



Lavar din

Kanaouenn skrivet gant Youenn Gwernig

Lavar din, Ô gwennig koumoullenn,
koumoullenn, lavar din me,
Perak emaout atav o tremen,
Atav en oabl o vale.
Bugel, tremenerez e vin bepred,
Eus ar mor d'ar mor eo va hent-red.

Lavar din, Ô duig gwennili,
Gwennili lavar din-me,
Bep ar mare emaout o tehi (tehet)
'vit distrej bep ar mare.
Bugel, tremenerez e vin bepred,
Eus ar mor d'ar mor eo va hent-red.

Lavarit din o tremenerien,
Rederien atav d'ar red.
Peogwir ez eo red d'an oll tremen,
N'eus tra da badout er bed.
Bugel, er bed, pez a bado bepred
A zo lezenn krouer ar stered.